

- 163 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

61. EUN DENICK BIAN A MEUS BET

(follennoù 197 - 198)

Eun denik bien a meus bet
 A ra din soubla eb karet
 A mond dar feunteñ eb sec'het.

A ra din neza hir a moan
 Monet dam goële eb tam dam c'hoan.

Nag a ra dime (c'hoas) was
 Pillad lan gant va zreit noas.

Pa deu dar ger gant e gorvat
 E kemer eur vas dam pillat.

Deffot na ran dezan krampoes
 A va fillik en Kærhaës,

Va spanel en Landivijo
 A va rosel en Gwimillau.

Va zrebes en Landreger
 Gant tri marechal e hober.

Va gwinis en milin Penhoat
 Non ket an eur da vond de c'herc'hat.

Va heuneud en Koad ar Sec'h,
 Va aman nouzon e pelec'h.

E vond d'ar foar da Lesneven
 E c'hasseziz var eun dunien,

(Sell. Ar Jouiss
 koz 55. Dornsk.89
 follenn 183)

Var eun dunien e hasseziz
 Ia, raz va c'halonik e voëlis,

Ia, gant keus dam iaouankis

Raz va c'halon e meus goëlet
 Gant keus d'am amzer tremenet

Evid goëla ne zistro ket.

- 164 -

Eun habid neve a meus bed
Evid he gwiska ne us ket.

Eun habid neve, neve flam
Evid he gwiska ne us tam,

A zo gred a huanadou
A zo gried gant an daoulouº ° kompreñ:
A bordet a huanadou. daeloù?

—————
VVVVVVVV

Jannet Puill, 14 janv. 1851.

—————
VVVVVVVVVVVV